

ROUEDAD AR BREZHONEG

Le réseau de la langue bretonne



brezhoneg@rouedad.bzh

Rouedad ar Brezhoneg
contact@rouedad.bzh

Le 13 décembre 2022

OBJET : Déplacement du programme 318 « Langues de Bretagne » dans la mission 2 Culture : « Qualité de vie et rayonnement »

Monsieur le Président du Conseil régional de Bretagne,

Nous avons été informés que le Conseil régional de Bretagne s'apprêterait à faire voter un déplacement du programme 318 « Langues de Bretagne » le 15 décembre.

Nous nous permettons de manifester une certaine surprise et incompréhension, d'autant que ce point n'a pas été abordé lors de la dernière session du Conseil Culturel de Bretagne.

Ce déplacement a en effet une portée symbolique forte qui nous inquiète pour l'avenir. En effet, le choix d'inclure la politique des langues de Bretagne dans la même mission que la formation avait été un choix stratégique de la part du Conseil régional lors de la définition de la première véritable politique linguistique de Bretagne en 2010, avec la nomination d'une vice-présidence dédiée aux Langues de Bretagne. Cela avait, à l'époque, été salué et faisait depuis consensus au sein de l'ensemble des acteurs de la langue bretonne.

Ramener cette politique linguistique dans le domaine des activités culturelles et de loisirs, au sein d'un ensemble qui serait a priori dénommé, toujours selon nos informations, « qualité de vie et rayonnement », ne semble pas aller dans le sens d'une véritable politique de réappropriation linguistique. L'enjeu est, en effet, la formation de locuteurs et la possibilité d'utiliser la langue bretonne dans l'ensemble des domaines de la vie quotidienne.

Ce déplacement pourrait donc se traduire négativement dans les résultats de la politique linguistique, ce dont nous nous inquiétons fortement. Il nous paraît indispensable que cet éventuel changement d'organisation ne remette pas en cause l'autonomie budgétaire et d'action de la politique linguistique de la région afin de permettre la mobilisation de ressources sur l'ensemble des domaines d'action définis par les « *Grandes orientations de la nouvelle politique en faveur des langues de Bretagne* » votées en 2018. De même, l'application de ces orientations, de façon transversale à l'ensemble des services et compétences de la Région, est une nécessité pour obtenir des résultats cohérents.

Dans le même temps, vous n'êtes pas sans savoir que l'Etat « traîne des pieds » pour appliquer la convention État-Région sur la transmission des langues de Bretagne, signée en mars 2022, singulièrement dans le domaine de l'éducation. Nous craignons donc que ce soit un mauvais signal envoyé à l'ensemble des Bretonnes et des Bretons impliqués dans la transmission et le développement de la langue bretonne.

Ce point rejoint par ailleurs une autre source d'inquiétudes, à savoir de nombreux signes qui laissent à penser que le budget en faveur de la langue bretonne n'augmenterait pas dans le budget 2023, contrairement aux engagements de votre majorité.

Nous ne pouvons croire que la politique de mise à niveau en faveur de la langue bretonne n'aura duré qu'une seule petite année. Si nous comprenons les contraintes budgétaires (crise énergétique, inflation...), nous rappelons que les sommes en jeu sont loin des autres programmes structurants régionaux et que tendre vers un budget proche de 1 % du budget de la région à la fin de cette mandature nous semble légitime dans le cadre d'une volonté réelle de mise en place d'une politique volontariste de réappropriation linguistique.

Nous vous assurons de notre volonté d'avancer ensemble pour l'avenir de la langue bretonne et resterons vigilants quant à l'application de la convention État-Région. Nous attendons une politique linguistique ambitieuse et renforcée et nous nous inquiétons des signes récents qui ne nous paraissent pas aller dans le bon sens.

Nous espérons que ce courrier retiendra toute votre attention et vous adressons, Monsieur le Président du Conseil régional de Bretagne, l'expression de nos salutations les plus respectueuses.

Liste des associations signataires :

Ai'ta!, An Alc'hwez, Ar Redadeg, Ar Falz/Skol Vreizh, Bannoù-Heol ,Bed niverel, Brezhoneg e Brest, Brezhoneg war-raok Bro Redon, C'hoariva, Daoulagad Breizh, Div Yezh Breizh, Dispak, Diwan, Drouizig, Emglev Bro An Oriant, Emglev Bro Douarnenez, Emglev Bro Gwened - Ti ar Vro Gwened, Fédération du Gouren / Bodadeg ar Gouren, Les enseignants et enseignants-chercheurs du Département de breton et celtique Rennes 2 / Kelennerien ha kelennerien-enklaskerien Kevrenn ar Brezhoneg hag ar c'heltieg Roazhon 2, Mat ar Jeu - Strollad c'hoariva, Mervent, Mignoned ar Brezhoneg, KBP-APLB, KDSK, Keit Vimp Bev, Kelennomp!, Kevre Breizh, KLT Ti ar Vro Montroulez , Kreizenn Sevenadurel Vreizhek Abherve-Sant-Brieg, Kuzul ar Brezhoneg, Preder, Radio Kerne / Radio Naoned, Raok - Brezhoneg e Kreiz-Breizh, Safar - Strollad c'hoariva, Setu !, SKED, Skeudenn Bro Roazhon, Skol arzoù ar sirk, Skol an Emsav, Skol Ober, Stumdi, Roudour, Telenn - Ti ar Vro Sant-Brieg, Ti ar Vro Bro Kemperle, Ti ar Vro Bro Pondi, Ti ar Vro Kemper, Ti ar Vro Landerne-Daoulaz, Ti ar Vro Treger-Goueloù, Ti Douar Alre, Timilenn

ROUEDAD AR BREZHONEG

Le réseau de la langue bretonne



brezhoneg@rouedad.bzh

Rouedad ar Brezhoneg
contact@rouedad.bzh

D'an 13 a viz Kerzu 2022

DANVEZ : Dilec'hiadeg ar programm 318 « Yezhoù Breizh » er gefridi 2 Sevenadur « Kalite bevañ ha skinadur »

Aotrou Prezidant Kuzul Rannvro Breizh,

Kelaouet omp bet eo raktreset gant Kuzul Rannvro Breizh votiñ dilec'hiāñ ar programm 318 "Yezhoù Breizh" d'ar 15 a viz Kerzu.

Souezhet omp gant ar raktres-se. N'omp ket evit kompreñ kennebeut n'eo ket bet gouennet e ali digant Kuzul Sevenadurel Breizh.

Arouezel-tre e vefe ar cheñchamant-se. Ankeniet omp eta evit dazont politikerezh yezh Rannvro Breizh. Lakaat budjet ar brezhoneg asambles gant ar varregezh stummadur a oa bet un dibab politikel strategel a-berzh Kuzul Rannvro Breizh, da vare termenadurezh ar politikerezh yezh gentañ en 2010. Anvet e oa bet ur besprezidantelezh evit ar brezhoneg hag ar gallaoueg ha betek bremañ e save holl aktourien ar brezhoneg a-du gant an dibab-se.

Ne seblant ket deomp e vefe poellek soubañ palioù adperc'hennadur ar brezhoneg e-touez obererezhiouù sevenadur ha dudi ar Rannvro, dreist-holl en ur servij a vefe anvet "kalite bevañ ha skinadur" hervez ar pezh a glevomp. Da vat emañ dalc'h dazont ar brezhoneg e stummadur brezhonegerien nevez hag en obererezhiouù a roio tro da bep hini e Breizh d'ober gant ar yezh bemdez, e pep tachenn e vefe.

Aon hon eus neuze e vefe diaesoc'h tizhout palioù an "*Heñchadurioù bras evit politikerezh nevez yezhioù Breizh*", bet votet ganeoc'h e 2018, ma vez kaset ar cheñchamant-se da benn. Diaesoc'h e vo luskañ obererezhiouù treuzservij en un doare efedus en abeg ma vo lakaet servij ar brezhoneg a-gostez eus politikerezhioù bras ar Rannvro. Evit pep barregezh ar Rannvro eo ret broudañ implij ar brezhoneg. Emren e rank bezañ neuze galloud ober servij ar brezhoneg e Kuzul Rannvro Breizh.

Gouzout a rit mat eo gorrek-tre ar Stad evit lakaat e-pleustr palioù ar c'henemglev Stad-Rannvro votet e 2022. Gwir eo kement-se evit an deskadurezh dreist-holl. Ur sin fall e vefe diskouez nebeutoc'h a youl a-berzh ar Rannvro er mare-mañ. D'ar Stad, kement ha d'ar vretoned ha d'ar bretonezed engouestlet evit treuzkas ha diorren ar brezhoneg.

Seul ankenietoc'h omp hag hon eus douetañs ne greskfe ket budjet ar brezhoneg e 2023, daoust m'eo bet prometet gant ho skipailh da vare an dilennadegoù. N'omp ket evit soñjal e c'hellfe hentad politikerezh yezh ar Rannvro mont war-zu an normalaat ur bloavezh nemetken. Emskiant omp evel-just eus redioù budjedel ar Rannvro er mare-mañ (enkadenn energiezh, c'hwezadur...), met rediet omp degas da soñj e chomfe gwan-tre lodenn ar brezhoneg er budjet, zoken ma vefe tizhet ar pal a vefe dleet, da lavaret eo 1% eus budjet ar Rannvro gouestlet d'ar brezhoneg e fin ar respetad-mañ.

Gouzout a rit e fell deomp mont war-raok evit dazont ar brezhoneg. Setu perak e chomimp war-evezh e-keñver engouestloù ar c'henemglev Stad-Rannvro. Gortoz a reomp ur politikerezh youlek a-berzh ho skipailh met ankeniet omp o welet ar sinoù a ziskouezfe n'emaomp ket war an hent mat.

Gant ma vo dalc'het kont ganeoc'h eus ar palioù boutin hon eus. Resevit eta hor gwellañ gourc'hemennouù.

Roll ar c'hevredigezhioù sinerien :

Ai'ta!, An Alc'hwez, Ar Redadeg, Ar Falz/Skol Vreizh, Bannoù-Heol ,Bed niverel, Brezhoneg e Brest, Brezhoneg war-raok Bro Redon, C'hoariva, Daoulagad Breizh, Div Yezh Breizh, Dispak, Diwan, Drouizig, Emglev Bro An Oriant, Emglev Bro Douarnenez, Emglev Bro Gwened - Ti ar Vro Gwened, Fédération du Gouren / Bodadeg ar Gouren, Les enseignants et enseignants-chercheurs du Département de breton et celtique Rennes 2 / Kelennerien ha kelennerien-enklaskerien Kevrenn ar Brezhoneg hag ar c'heltieg Roazhon 2, Mat ar Jeu - Strollad c'hoariva, Mervent, Mignoned ar Brezhoneg, KBP-APLB, KDSK, Keit Vimp Bev, Kelenomp!, Kevre Breizh, KLT Ti ar Vro Montroulez , Kreizenn Sevenadurel Vreizhek Abherve-Sant-Brieg, Kuzul ar Brezhoneg, Preder, Radio Kerne / Radio Naoned, Raok - Brezhoneg e Kreiz-Breizh, Safar - Strollad c'hoariva, Setu !, SKED, Skeudenn Bro Roazhon, Skol arzoù ar sirk, Skol an Emsav, Skol Ober, Stumdi, Roudour, Telenn - Ti ar Vro Sant-Brieg, Ti ar Vro Bro Kemperle, Ti ar Vro Bro Pondi, Ti ar Vro Kemper, Ti ar Vro Landerne-Daoulaz, Ti ar Vro Treger-Goueloù, Ti Douar Alre, Timilenn